

# SALM 113 b

On Doue a zo en neñvou, kement a fell dezañ a ra !

# " !" # %  
! " %  
\$

& ' # ( )

+ ( " , - ( + )  
) \* ' + ( + ,  
&& ' ( + ( + ,  
, %

. / 0( 1 2 1 3 2 1

2 1 /  
& / ( 1 !" 2 3 %  
& ( + + ( 0 " %  
& 8  
&- . ' # ( 67 6 ( # + / ( , %  
4 5 /

# SALM 113 b

1. N'eo ket deom-ni, Aotrou, n'eo ket deom-ni,  
Med d'az Ano, ro gloar evid da garantez ha da fealded.
2. Perag e lavar ar broadou :  
"Pelec'h ema o Doue?"
3. On doue a zo en neñvou;  
Kement a fell dezañ a ra !
4. O idolennoù a zo arhant hag aour,  
Labour daouarn an dén.
5. Eur genou o-deus ha ne gomzont ket,  
Daoulagad o-deus ha ne welont ket.
6. Dioueskouarn o-deus ha ne glevont ket,  
Eur fri o-deus ha ne zantont ket.
7. Daouarn o-deus ha ne zornatont ket,  
Troid o-deus ha ne valeont ket,  
Mouskomz ebed en o c'horzailenn.
8. Evelto ra vezo ar re o-deus greet anezo,  
An neb a laka e fiziañs enno.
9. Izrael, lak da fiziañs en Aotrou,  
Eñ eo da skoazell ha da skoed !
10. Tiegezh Aharon, lak da fiziañs en Aotrou,  
Eñ eo da skoazell ha da skoed !
11. Doujerien an Aotrou, lakit ho fiziañs en Aotrou,  
Eñ eo ho skoazell hag ho skoed !
12. An Aotrou e-neus soñj ahanom : benniga a ray,  
Benniga a ray tiegezh Izrael,  
Benniga a ray tiegezh Aharon,
13. Benniga a ray doujerien an Aotrou,  
Ar re vian hag ar re vraz.
14. Ra gendalho an Aotrou e vennoziou,  
Warnoc'h ha war ho pugale.
15. Benniget ra viot gand an Aotrou,  
E-neus greet an neñv hag an douar !
16. An neñv eo neñv an Aotrou,  
Hag an douar e-neus roet d'an dud.
17. N'eo ket ar re a varv a veulo an Aotrou,  
Rag oll e tiskennont da vro an dilavar.
18. Med ni eo a vennigo an Aotrou,  
A-vremañ ha da virviken.
19. Gloar d'an Tad, d'ar Mab ha d'ar Spered Santel  
A gantvejou da gantvejou, Amen !

45&&6  
( # ,  
& 7 3 8 4 3 8 # \$ \$  
. 8 # 3  
9 3 %  
; ! \* ! <  
67 = ! 9\* \* ! <  
# #  
> ? @ ! 3 3 3  
" 3  
3  
A # 3 !  
3 3 # !  
,  
- B ! ##  
= ! @  
C @ #  
) \* D# 4  
! ! !"  
,  
&EF# "( # 4  
! ! !"  
,  
&& G 9 ! ? 4  
! ! !"  
,  
& \* 4 \* \$ # " D \* \$ ,  
\* \$ # "( <  
&6 \$ ! @! 4  
3 3 3  
& B 4 # 3  
,  
&>4? \$ 3 4  
B ! ,  
& ! !" ! 4 <  
( @ ## \* \$  
&A # 3 4  
7! @ ! !  
&- 7 \$ 4  
. 3 H H ,  
&) I H F 4 3  
H H (# ,